

Gerioù ar vuhez




IZEL

Izel

Breizh-Izel ha Breizh-Uhel

Kerne-Izel ha Kerne-Uhel

An Izelvroioù
pe ar Broioù-Izel



http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudenn_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Avel izel, avel o tont deus ar C'hreisteiz
peotramant deus ar Mervent

Izelvor, pa vez izel ar mor, pa vez daere
Itron Varia Izelvor e Forest-Fouenant

Ba Tremargad zo Lamboull Uhelañ ha
Lamboull Izelañ

Kanaouenn ar Vretoned gant Auguste Brizeux
« O Breizh Izel, o kaerañ bro, koad en he c'hreiz,
mor en he zro »

Kousk Breizh Izel gant an Abad Marechal,
ur ganaouenn a veze kanet alies-tre e-kerzh an
euredoù hag all...

Jean-Luc Roudaut en doa kanet anezhi ivez
war e bladenn Kalimba, embannet e 1994

Pa vez keñveriet :
Izeloc'h evit un dra
bennak
Izelañ, an izelañ tout

Izelbriz, pa vez diskennet
ar priz, marc'had-mat

Izelder, ul lec'h izeloc'h
evit ul lec'h all, pa vez un
toull da skouer

Izelek, un den n'eo ket
poufer tamm ebet, un
den uvel

An dud izel n'int ket
pennoù bras

Da vont pelloc'h

Kit da selaou ar ganaouenn
Kousk Breizh Izel gant
Eliane Pronost
peotramant gant
Morwenn Le Normand
war ar bladenn
Moussig, berceuses et
comptines de Bretagne

Cofinancé par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne



Avec le Fonds européen
de développement régional

